

*Tud ar vro - Bro Leon*  
Roll kanaouennoù - Dañs round

**An « Eau de Vie »**

Selaouit hag e klevoc'h, lonla, selaouit hag e klevoc'h, [klevoc'h=klevot]  
Hag e klevoc'h kanañ, Digidondène ma dondène,  
Hag e klevoc'h kanañ, Digidondène ma dondè.

Ur chañson 'zo kompozet, lonla, ur chañson 'zo kompozet,  
A-nevez er bloaz-mañ, Digidondène ma dondène,  
A-nevez er bloaz-mañ, Digidondène ma dondè.

'Zo graet d'ar baotred yaouank, lonla, 'zo graet d'ar baotred yaouank,  
A gar an « eau dé vie», Digidondène ma dondène,  
A gar an « eau dé vie», Digidondène ma dondè.

Plijadur vras ho poefe, lonla, plijadur vras ho poefe,  
Ma c'hellfoc'h he deskiñ, Digidondène ma dondène,  
Ma c'hellfoc'h he deskiñ, Digidondène ma dondè.

Na pa'z it-hu d'ar foarioù, lonla, na pa'z it-hu d'ar foarioù, [hu=c'hwil]  
Peotramant d'ar marc'had, Digidondène ma dondène,  
Peotramant d'ar marc'had, Digidondène ma dondè.

Na profit (ket) d'ar marc'hadour, lonla, na profit (ket) d'ar marc'hadour,  
Ouzhpenn pemzek gwenneg, Digidondène ma dondène,  
Ouzhpenn pemzek gwenneg, Digidondène ma dondè.

Koll a reont o jiletlennoù, lonla, koll a reont o jiletlennoù,  
O zog diwar o fenn, Digidondène ma dondène,  
O zog diwar o fenn, Digidondène ma dondè.

Setu aze kaerañ micher, lonla, setu aze kaerañ micher,  
D'ar wazed diskabell, Digidondène ma dondène,  
D'ar wazed diskabell, Digidondène ma dondè.

Deomp 'ta bremañ d'ar merc'hed, lonla, deomp 'ta bremañ d'ar merc'hed,  
Hep chokañ den ebet, Digidondène ma dondène,  
Hep chokañ den ebet, Digidondène ma dondè. ["chokañ"=feukañ]

Koll a reont o zavañcheroù, lonla, koll a reont o zavañcheroù,  
O c'hoef diwar o fenn, Digidondène ma dondène,  
O c'hoef diwar o fenn, Digidondène ma dondè.

Setu aze kaerañ micher, lonla, setu aze kaerañ micher,  
D'ar merc'hed diskempenn, Digidondène ma dondène,  
D'ar merc'hed diskempenn, Digidondène ma dondè.